

B

DISPUT

ETRE AN AOTROU HAG AL LABOURER DOUAR

AN AOTROU

Pa deuez d'ar zadorn barz e ker
 E tlefez kaout eur boutou ler
 N'en eur glever ket er marc'had
 Gant an trouz euz da voutou koat.

AL LABOURER

Neo ket gual yac'huz a gredan
 Kaout eur boutou ler er goan
 N'heller ket ganthro beachi
 Etouez ar fank hag ar pri.

AN AOTROU

Men oar n'heller ket o dougen
 Evit passeal ar vouillen,
 Mez pa vez prest d'antreal e ker
 E tlefez kaout da voutou ler.

AL LABOURER

Ma tiwiskfen va boutou groz
 M'ho rankfe o lezel er foz,
 N'hellan ket em dourn o derc'hel
 Nag o fourra doun em godele.

AN AOTROU

O te zo eul laban !... Perak
 Ne glaskez ket eun ti benag
 Evit lezel da voutou koat
 Ken a deufez euz ar marc'hat ?

AL LABOURER

Ma ne baefen ket va disken
 'Kousfe d'in eul lagad ejen,
 Daou wennek ar zizun el leal
 En eur bloaz a ra ugent real.

AN AOTROU

An avaristed va mignon.
A zo krog mad en da galon.
Eur pez a ugent real er blâ
Gant an oll a deu hag a ia.

AL LABOURER

An hini zo leun e skudel
Ha ne za seurt euz e c'hodel
A zo brao dezan kaozeal
Var stad reuzeudik ar re all.

AN AOTROU

Hervez ma kombez e sonj din
E peuz c'hoant da zisput ouzin
Mar e peuz poan en da stad
Men a rank ive labourad.

AL LABOURER

Pell goude ma ven var vale
C'hui vez « trankil » en ho kuele
Ha pa vez varnon ar c'huezen
C'hui a vez braoïk o pourmen.

AN AOTROU

Peb hini en deuz e vicher.
Men oar e peuz labour pounner. —
Mez al labour douar neo ket
Ken stard eged ar boan spered.

AL LABOURER

Aotrou ker, meur a vech bemde
Men meuz an eil hag egile
Poan vraz o labourat dija
Muioc'h o klask goût penaoz beva.

AN AOTROU

Diouz an douar a labourez
Brao gant da famil e vevez
Ha seuvui da boan a laki
E po eost mad ha brikoli.

AL LABOURER

Neo ket awalc'h d'in eosta
Red eo da c'houel Mikeal bep blâ
Kass eun dournad mad a arc'hant
D'ar mestr, pe ne vo ket kountant.

AN AOTROU

An hini labour koumanant
A zao anezhi kals arc'hant
Dre ze eo just da vestr an ti
Kaout e interest divarnhi.

AL LABOURER

Ia, ma ne vijent ket fermet
Muioc'h eget ma oant prenet
Mez bremen eman deuet ar c'hiz
Do fermi en tu all d'ho friz.

AN AOTROU

Ma zeuz koumananchou re ger
Marc'had mad ive e kaver
Gueled em euz evit kant skoued
Douar peder bouzellad ed.

AL LABOURER

Mar e zeuz bet 'vit ne zeuz mui,
Rak dre ma chencher ar vistri
E kresk ar priz hag an ijia
E chencher baz d'an daboulin.

AN AOTROU

Goût a ran e peuz bara dû.
Mez respount ac'hanon dioc'htu :
Ma vijez bevet delikat
Penaoz e c'helpet labourat ?

AL LABOURER

O ! m'am befe men bara guen
Guin koz, kig rost ha saladen,
Men a labourfe kals c'huekoc'h.
Dre mam befe kaloun krevoc'h.

AN AOTROU

Ar cher vad pa za da eun ti
A zoug an den d'an diegi
Hag eur c'houeriad dispigner
A guez dizale er vizer.

AL LABOURER

Ne c'houlennan ket a friko
'Vel ma ra pennou braz ar vro ;
Men vije kountant manivig
Gant souben fresk hag eun tam kig.

AN AOTROU

Te pefe c'hoant rei da gredi
Ne peuz kazi tam da zrebi
Mez da figur d'in a ziskouez
Ne rez ket a goreiz bemdez.

AL LABOURER

A ben 'meuz roet va arc'hant
D'ar Mestr ha d'ar C'houarnamant
Ne jom ganen kazi netra
Evit kaout dillad ha bara.

AN AOTROU

Te zo eur paot fin a velan
Tor e meuz, tevel a rankan,
Ma kerez dont ganen d'am zi
Men roio d'id da zijuni.

AL LABOURER

Nan Aotrou, o trugarekat,
Rak men meuz dijuniet mad,
Hag ouspen-ze va boutou louz
Dre ho krampchou a rafe trouz.